

Ton ar ganaouenn skosat SKYE BOAT SONG.

— I —

Adal ar beure, beteg an noz,
Pesketa eo va lod.
Kuiteet em-eus va ziig kloz
Kluchet e-tal an aot.

Diskan :

Luskell, va bag, war gribell an dour,
Dispak da ouel, ha red !
Kaset war-raog en avelioug flour,
Sent ouz ar stur bepred !

— II —

Arne oa bet, gleb-teil e oan,
Kounnaret oa ar mor.
Me ne ran van, red eo kaoud poan,
Treh om d'an avel-vor !

— III —


Breman eo brao, seder ez on ;
Gwenn-erh e nij ar spoum.
Beg lemm va bag a skej an donn,
Kaset om dreist ar houmm.

— IV —

Kent pell vo eet an heol da guz ;
Pesked e-leiz em-eus.
Tro-war-dro din, bezinou druz,
Va bag o zroh heb freuz.

KERLANN.

(Kanaouenn embannet gand « AR FALZ » e 1937).



L
U
S
K
E
L
L

V
A

B
A
G